

15 EOST-15 GWENGOLO 75

«POBL VREIZH»

B P. 304

29273 BREST-CEDEX

koumanantoù

Boutin : 10 lur

Skoazell : adaleg 20 lur

C.C.P. 2746-79 Rennes.

NIV. 67

1^{LUR}

POBL VREIZH

Niverenn ispisial 10 pajenn. Kavoud a rafet e-kreis an niverenn-mañ ur follenn iskis a-walc'h leun a c'herioù brezhoneg gant o zroidigezh c'halleg. Beb a bajenn evel-henn e kavfet en deir niverenn Pobl-Vreizh da zont ; mirit anehe aketus ha pa'po ar beder fajenn e c'hallfet ober gante ur mini-geriadur brezhoneg, geriaoueg diasez ar brezhoneg, enni war-dro 2 000 ger er skritur newez.

EUS PESEURT TU E TEU AR RUSTONI ?



HAG A-NEWEZ ER VRO ?

PIW A RA AR GWALLDAOLIOU ?

Abao e ma Giscard e penn ar stad, ne vez kaos gantañ nemed eus ar frankis : ar frankisoù, ar eskollet liberal avañcheñ, ha me oar me ? Arabad dimp lonkañ se evel gwir-batez, e frankis dezant zo frankis d'ar kapitalisted d'ober teil gant dourc'hwes al labourerien.

Pa gomz ar batronez eus «frankis al labour», ec'h eo euid enebñ ouzh gwir al labourerien da ziskregiñ diouzh o labour, euid enebñ ouzh frankis ar sindikajoù.

Anad eo penaos, a-van de-van, e vez lakaet bec'h war frankisoù al labourerien, Abao en toullad misoù, e velomp ar poliss o tiflukañ beb tro ma vez bec'h en un usin, euid skeiñ... gant al labourerien, eveljust. Dalc'homp sonj eus ar pezh o deus graet da-geñver harz-labour «Transocéan» en Brest, hag euid herzel ouzh labourerien Ti Corlay da dostaad ouzh ar prefeti en Kemper.

E-keit-se, emae ar gouarnamant o klask tremen lost al leue dre hon genoù. Ha graet e vez un bern trous tro-dro d'un danvez all : heni an daerjenn.

Ar c'hasennou hag a lip botoù hon aotronez meur, a vez leun a gelouioù diwar-benn kement gwallad pe mesteal a vez. Dre-se e klask ar gouarnamant distreiñ al labourerien diouzh o c'hudennou gwirion. A zo gwastoc'h, klask a ra iwe lakaad war chouk al labourerien, an alan a daerjenn zo en-dro dimp : en ur lakaad keñver-ha-keñver, manifestadegoù ar vicherourien o tifenn o bara, ha gwalldaolioù al laeron hag an dorfadoù. Gant ar vezh memestra !

Kement-se n'eo ket newez. Bewech ma vez aru berr war ar kapitalisted, e lakaont o follis da c'hoari, ha bec'h d'al labourerien, bec'h da lakaad da deval ar re zo o tifenn o frankisoù hag o gwirioù pennañ.

Daw d'al labourerien respont bremañ : dre en em unaniñ a-eneb ar galloud, ha dre zifenn ervad o sindikajoù.

En ur zisklaerñ gant nerzh, gwalldaolioù diniver ar sistem kapitalist : gwalldaolioù ar batronez a-eneb al labourerien : ar goprou isel, an dilabour, an doareoù-labour, hag all...

Enebñ ouzh an droeg graet ouzh ar Vretoned : pa vez red dezse dirveañ da glask labour e lec'h all, pa vez letr'hon hon douaroù gant an eme c'hall ; pa vez lamet diganimp istor ha yezh hon bro gant o «deskadurezh».

An daerjenn-se, ar gwalldaolioùse 'ni vez red disklariañ ha stourme oute.



1 - Tawerjenn : faulster, rustoni, palforarazh : violence.

DA ZESKIN BREZHONEG HA D'E BEURZESKIN UL LEVR NEWEZ SAVET GANT FANCH MORVANNOU :

assimil

«AR BREZHONEG DIDORR»

AN TOURTER HAG AN ARCHER...

Abaoe ur pennad mat, evel ouso'h, e vez bec'h ha chikan beb ar mare etre tud Trabivan diwar-goust an donarou emset krog da adloennañ.

TRAOU NEWEZ BARZH TRABI-VAN.

Med d'al lun gentañ a vis even, sed ur gont all : abred eus ar beure 'oa charret d'ar bourk teir pe beder garg jafardmed mobilis eus Gwengamp ! Alvaner peansted Trabivan, evel just !

Da zival an tourterien 'oa deut al lankoned-se (hag an eil prefed d'o heul), gant aon mousard, vije harzet ar bulidserien d'ober o reus.

Ha peogwir 'chome sioul enberien an adloennañ, souezlet o welet kement-se 'dokoù plad 'oa daw d'ar re-mañ kaoud un digarez all da fichal ha da fitval. Setu, kenkent ha ma tontae ur paour kaerzh kaertermed da glask tenañ politrejoù e oant sotat, hag i war e lec'h, mell-divell, war o motioù 'wechou...

AN NEB NA SENT KET...

Un afer hudur, an adloennañ 'barzh Trabivan, ha luet deus ur penn d'egle ! Da zigenañ, n'eus bet biskoazh 'med darn vihan eus al labourerien-douar o vont krenn 'eneb, ar re just 'walc'h a oa bet kent o kaballid 'eneb ar mar hag e gonsailherien (a zo komunisted) er votadeg parres ! N'oar ket an nen peira 'faot dehe : pe difenn an natur, harz ar re all da zisañ 'hañ girzhier, pe difenn o gwirioù, pe kriadad douaroù ? A-du 'vefent bremañ da adloennañ dre gaer...

Fimet ar mar hag e gamaradoù o welet an dud dispartiet, ha lod o stourm ken diduz, hag abaoe kend-all. Aet da c'houll sikour Gwengamp 'michañs... Setu digarez neuz d'ar gouarnamant ha d'e vewelen d'ober aon d'al labourerien, da spourañ aneñ : un «trao-dorn» ouzhpenn 'zigant ar Pontatowski, hag unan digoustoc'h 'wid er gër vras... Digarez 'walc'h ive da lod all da fistoual ha da vekiñ : «stourmerien» a beb seurt gis zo dic'haloupet di da rital ha da ginnig o «ofisoù... d'an daou du enebet.

Eneberien an «adloennañ» a zalc'h penn evelkent : d'ar sul 3 a vis cost 'vo galvet tud ar vro da zont da welet ar «C'houlejoù Digor».

DRE GAER PE DRE HEG ?

Distoned o deus dija greunadennoù Trabivan dre ar c'houlejoù : an devezhiou war-lerc'h 'isklêrie tud Motreñ 'hooullent ket e mod ebed e vije adloennañ dre heg douaroù ar gomun, seul vui ma anavezont re vad an heni a gasso e dourterien bras pa 'dioint echu c'hoari 'barzh Trabivan : Barsez 'ni eo, mar Motreñ...

MENGLEUZHIOU BREIZH EN ARGOLL

Bodet e oa bet *Burew Politikel U.D.B.* d'an 19 a vis Gouhere 1975 en Orient. Mantret eo gant stad spontus ar vengleuzerien en Breizh.

Pa vez an hañf o tont, ne vez ket al labourerien kement war evezh, mad e oa ar c'houle, eta, ha serret eo bet ar C'houle en Gouele-Leon gant an «trast-ou estren».

Ar ru eo tro labourerien pri-gwenn Berriet da vevañ en arvar bras da goll o labour.


Peadra zo da derañ, da fuloril dirag sort douaroù vil ! Gervel a ra eta *Burew Politikel U.D.B.* oñ labourerien Breizh d'en em sevel a-eneb loustoni an «trast-ou lievroadel» (multinationaux) hag a zo o laerzh poudigezhioù douar-kondon Breizh en ur gemer perzh er manifestadegoù demokratel euid sikour stourm ar vengleuzerien.

NA PEGEN BRAW EO BEWAN E-BARZH AR MOR-BIHAN !

Ya, 'vad ! 'Ar wellad e ha an traoù e-barzh ar Mor-Bihan : n'int bet biskoazh gwel ! Setu ar pezh a lare, n'eus ket pell zo, an «Aotrou Iroing (Alexis, Pier, Mari) Gicquel, sekretour-meur, penn-vezer *Servijou Kamb ar Gouvers* hag an «Jenerc'h eus ar Mor-Bihan, en Orient, hag iwe, 'ar un dro, president *Kendalc'h, Un Euzra, kwa* ! Ya, e kendalc'h ar *Vretoned Divoet*, bet dalc'het e Rostren, d'an 8, 9 ha 10 a vis Eost -ur c'hendalc'h gwastoc'h 'wid lu, e gwirionez, an Aotrou Gicquel en deus komzet flour euid komepañ an traoù ha roñ un tammig esperañs d'ar Vretoned divroet pe get : «C'hw' wela 'Hep dalc, e vo santet pegen uhel eh omp adavañ ! Ur burzhad !».

A bwa emae an Aotrou Gicquel e ober goap ? Ag an oll Vretoned, sur, hag a re ar Mor-Bihan er c'hentañ penn. N'eus ket gwers, le an «*Telegramme*» (ha hoazh an «*Telegramme*» n'ema ket kement-se a-du get *Publ-Vreizh*), e lenned kement-mañ :

«*Kamb ar Gouvers departamant ar Mor-Bihan he deus embannet ur studionn ac'zout stad an ekonomiezh en ekonomiezh en departamant. 30% ag ar re issafsiet e-barzh «Breizh-4-D» e chomel e-barzh an departamant-se. Hag euid sklaemad an traoù, mase e vo mad goued eh eus bet issafsiet, e-pad c'hwec'h mis kentañ ar blé, 1 044 a dud er Mor-Bihan, 731 er c'côtes-du-Nord, 1 402 er Finister ha 1 532 e Ille-ha-Goullun. Se a ra 4 530 a*



Mengleuz staeñ Lokourman-Leon a zo bet serret.

dud issafsiet, da lareo e 4 530 a dud dilabour, get ar re a oa dija, euid *Breizh-4-D* a-bezh, Talbenn an «*Telegramme*» (19-8-75) zo sklaer : **Le Morbihan est le département breton le plus touché par le chômage.** Ur wech c'hoazh, ma zo ur gazetenn vil e Breizh, e lakaad ar Vretoned da gouzout, an «*Telegramme*» an heni eo ! Membr an «*Telegramme*» n'hell ket kuzhad ar wirtionez ! Ha neuze, Aotrou Ivonig Gicquel, e-menn e oac'h a pa eo bet embannet studijenned *Kamb ar Gouvers* ? E vakadegoù marse ? Gwell e vebet bet deoc'h serrif ho pezh neuze e Rostren.

Rag nend a ket mad an traoù tamm erbed. Ouzhpenn, 1 044 a dud issafsiet er Mor-Bihan, eh eus 8 066 a dud o klask labour *ex-ossial* ; e gwirionez, eh eus tost da 15 000 a dud dilabour er Mor-Bihan, ha kement-wid daet ag ar gwellaenned degaset get an «*Jenerc'h*, hag e kontrel, ar *Mor-Bihan* er penn kentañ euid an alkooleghezh hag ar mezerezh. Siwazh ! Ma'z eus ur c'horn ar-gallakeñ e Breizh, ar «*Bihan* an heni eo. Emae ar pennoù bras, Laudren, Bonnet, Marcellin e terc'hel an dud edan o bell, doc'h o lakaad da gouzout get o froumessañ diniver ; emaint e servijañ get gred ar re a zo e Paris, e tistruj hor bro hag e lakaad ar Vretoned da voned pell ag o bro da glask labour ; emaint e voutgañ personelezh ha vez ar Vretoned, a nebedigoù, Breinet eo pep tra gite.

E-pad ar vakadegoù, ar Mor-Bihan a ya da vevet, get an douristed. Kement tra vez graet ewite. Ne us nemed an douristed hag a gonta. Ar re 'rall zo ar heni ! Savet 'vez gouellou mod-kozh euid an douristed, dornadegoù mod-kozh, euredoù mod-kozh, 'vel an heni a zo bet gwratañ er Gemene-Lokmaloù, da zeiz gouel Maria Kreiz-Eost. Get ar vevl ! Emae ar Vretoned e vad o danied, e lakaad o gwiskamant o broad hag, e vez sellet doc'he 'vel doc'h loened kuzhi. Petra e 'hounez Breizh god kement-se ? Netra, falkoraz nac'h, Kofversanted ar Gemene o deus gouzout

argant, sur, get an dud a oa dederet du-se d'an deiz-se, med his diar goust ar m'ere'hed yaouank a oa e servijañ, euid ur pae dister. An douristed iwe e vez gouzout argant diar o c'houst : 1,50 lur ar banne kafe en Oxtaleri Breizh er Gemene. Pep tra 'vez gwratañ da lakaad ar Vretoned da gredif ez eo evel-se emae an traoù e wellad ! Neuze, a-du eh oc'h get Laudren, Marcellin, Bonnet, euid ober ag hor bro un dachenn diger d'an arme ha an douristed ? Get ur garg 'vel ho heni-c'hwec'h, e diebec'h, e kontrel, diger o diostadeg d'ar re 'rall. Mes, gwir zo : unan dall n'hell ket diskouez an hent d'ar re 'rall.

1 - Arallakez : alidri

ULTIMATUM

Embannet ez eus bet newez 'vo gant ar strolladoul sevenadurel breizeg, un disklariad, hag a zo en gwirionez ur meni ultimatum. Goulenet o deus ur bern traoù digant ar gouarnamant, reolennoù newez euid ar brezhoneg, er skolioù, er radio, en tele hag e vubez forañ (publik) darn deus ar goulennoù-se da sevelañ a-benn digradur ar skolioù e mis Gwengolo, darn all diweztaoc'h.

Ma n'eus respont ebed deus perzh ar gouarnamant a-benn mis Gwengolo, pe ur respont kamm-gilgamm, eo gret ar strolladoul sevenadurel da roñ lañs d'ur stourm newez.

Sed ase, a-benn ar fin, ur c'heloù mad. Re bell zo (abaos meeting Pöfö!), e oa chomet damgouez ar vrezhonegerien. Ar ru eo poent skola !

U.D.B. eveljust a zo a-du euid roñ an dorn : se zo kaos ez eus bet embannet kement-mañ gant *Burew Politikel U.D.B.*

«*Dis klaret eo bet gant ar strolladoul sevenadurel breizeg, bodet e Brest d'an 18 a vis gouhere 1975, pegen fallakez ou politikerezh ar gouarnamant e-keñver ar brezhoneg.*

Koumant-bras eo U.D.B. gant disoc'h an emvod-se hag a gondaon politikerezh kilstourm ar gouarnamant ha ken-neuz-er-ve, peogwir emae U.D.B. abaoe ouzhpenn bloaz zo o klask evel asambles gant ar strolladoul-se un talbenn ledan euid kregiñ gant brezhonekad an hanouñ-lec'h en Breizh.

DILOC'H D'AL LOC'H

(beaj e bro-Skos)

Adal m'hon devez tro, ni, Bretoned, da voned en tu-hont da harzoù Breizh, e vezomp souezhet, sebedennet zoken, a-wechoù, o weled labouradegoù bras e-leizh, gourhentoù ha kéroù e peb lec'h, ha petra-din-me c'hoazh o lekad anad deomp idiorerzh hor bro. Mad l' Gouzout a ouzomp ez eo bet troet ha distroet a beto tu ar gudenn-mañ gant paotred ha merc'hed U.D.B. ha gant araokounion all, pellic amzer zo. Padal, ur wech ouzhpenn, kenreiz ker, hon defe c'hoazh da reñ skivoù deoc'h evid prouñh n'eo ket bouc'hennoù a lavaromp deoc'h, hogen ar wirionez kriz. Displegañ a reform ar gudenn dre zinevell ur vevj hon doa graet, va mignon Mikael R. ha me, eus Roskov da Vro-Skos e miz here diwezhañ. Er stumm-mañ, moarvad, e teufet gwelloc'h da gompen e pe stad reuzseudig emes Skos ha Breizh en amzer-veremañ e-keñver kreiz Europa.



An arne o tuta... evel e Breizh.

Emichas, n'henn gouzoc'h ket : e-maez eus aodoù Breizh, war-hed un nebeud lewiadou diouts, emes an hent-mor brasañ a'ri'bed. Berdeze e tremen eno, e-gantadoù, listri-kenwerzh a beb seurt (listri-eoul, listri-mañ, ha listri-karg all...) o toned hag o voned pe war-du porzhioù bras an hanternoz (an Havr-vevez, Dukark, Londrez, Rotterdam, h.a.), pe etrezeg broioù ar sav-heol, pe c'hoazh war-gaoud an Amerik. Achenta l' tudou kaezh, n'hallomp-ni tenañ heb gounid diouts, rag, siwazh deomp, n'eus porzh kempenn ebet d'o degemer du-mañ l' Koulskoude avad l' Daoust hag-er-ni veje ket tu da zegas pirdvidigezh d'hor bro, evel gwechall, a-drugarez d'hol listri ha d'hor porzhioù ? Eo, sur, Hogen, red e vije d'hor gouarnant hon skour da aozañ hon douar evel ma skour da aozañ kornioù zo eus ar Stad c'hall... Ma l' petra 'fell deoc'h ?

N'eo ket war-c'hoazh kentañ c'hoazh, nemed charis a ve, e teurvezio dezari diorien hon armerzh etal ma ve diest, da lavaret eo, diouzh ezommoù hor pobl. ...E lavaren eta hon devoa dispartiet Breizh, Mikael ha me, eus Roskov, e Bro-Leon. Hol lestr-beaourion hor c'hasas beteg Plymouth e-leizh ma erujomp d'an dri a viz here, e-tro eizh eur eus an noz : diwanañ eo hon doa heuliet gant hon daouglad, diagent, tremenit stank batimantou Mor Breizh.

... En deiz war-lerc'h e weljomp, a-dreuz gwerennoù hon tren, un daolenn he dije badaout kenkouz-all hor c'henvez m'o divije tremenet dre abont : ar *Middands*, e-kreiz Bro-Skoz. Blakozh em buhez n'em boa gwellet kement a siminaloù, a labouradegoù, a géroù bras, a c'hilouegi, a voged, hag a virvili l' Sed ahont ur vro hag a oa diorret-mad an linerezh eno, beteg re zoken l' Krediñ a ran em boa soñjet neuze e m'arbed hor maezioù hag hor c'héroù o c'h'aspedi' n'ouspede doue ma vije plantet un ti-mekank bennag en o zachennou jirmerzhel goulo.

Din-Edin (*Dùn-Eideann, Edinburgh*), d'ar 05.10.1974 :

Fæzh e oamp ken e oamp a-benn un devezh hag un nozvezh. Daoust da se, avad, e kemejomp ragal ur c'harr-boutin da gaoud *Inverness (Inbhir Nis)*. Ur gêr a gêr, honhont l' Neozh, soñj fall hon devo bepred anez, rag, darded e vop deomp, d'ar poent-hont, kouezet dindan lagad al loar, abalamour d'ur c'hozh lorenneg en doa hon diarbennet en ostaleri ar-re-vaouank. A-drugarez Doue, goude ar reuzad-se, hon doe ur c'horfad c'hoarzhin : soñj l' ta l' E-leizh degouezed an ostaleri marc'had-mad evel ma krede deomp da gentañ, edomp, genouerien a oa ac'hanomp, e kein unan loc'huc'ha l' E c'hellit divinoud aas a-walc'h peseurt penn a reas an ostizion ouzhor gwelad, kribbet-fall, gwisket evel-evel, ha l' eizh hon dremmoù a varvennoù l' Fidandou l' Karzhañ a rejomp ac'halehont gant ar foeltr, ha yao er-maez, digor-bras hor c'horzailhenn ganimp l' A-benn fin an dro, evelkent, e kavomp lojez ha gwele evid ur priz deraed.

Ullapool, d'ar 07.10.1974 :

D'ar mare m'edomp o weladenniñ Bro-Skos, ar bolikerion a zanteze eus o gwellañ an dilennadeg a oa da vezañ. Ha setu m'hon devoe charis, end-eeun, da seloua prezegen ur devez-kannad eus pastell-vro Ullapool, n'kontrou MacRae, eus an S.N.P. (katezenn vroadel Skos) e'beb bloaz, emez l', az eus 80 000 divroad

du-mañ, abal'nc'ur ma'z ar c'hevelioù hag al labouradegoù daved toledoù Bro-Skoz. Ar yaouankizoù a rank kuitad o douar dre ziouer a labour. Evid gwir, o koll he gwad yac'han em ar vro. Ha ken gwazh a zo l' Hon tachennoù-pesketa, kouz hag hon danvezioù all, zo gwastet gant an estrajourion l' Ha MacRae da ginnig o ledasad en hevelioù dae ma vije miret pirdvidigezhioù ar morioù skos. A-hend-all ec'h embannas, en anv e strollad, e embiezh ouz ar C'henvar'had, un dromplizon, gouez dezari (da-lasañ)... kement ha kiozañ an abedenn e roas da skwer, hini Bro-Norvegia a zivalhe he Stad hag he franki dre youl he mibion, ha netra ker.

Er fall ne oa nemed kriadenniz a-du gant an danvez-kannad, pell ac'hane l' Tud zo - Labourerion, Frankizourion ha Mirourion aneze - a savas o mouzha da zfeñt ar strolladoù aneb, ha keroùc'h zo, e samjont an S.N.P. gant seizh pec'hed warn-ugent hag ouzhpenn, an hini apontusañ aneze o vezañ, war a lavaren ar vroadelouriezh skosad hag ar c'hoant da zinac'h galloud ar Gurrunen.

MacRae, eñ, a respontas peb tro ken sioul ha tra, gant komzoù reizh ha poelleg, heb ankounac'haad da leusket gwech ha gwech all ur farsadenn bennag a lakae e setouerien da sklokal gant ar fent, evel homañ, da skwer : «E derou hor c'hanved, un enez eus du-mañ a vege well-wazh 25 000 darvad. En deiz-a-hiziv, mignoned ker, ne vev mui nemed 25 000 konik l'»

Tural evezh e reas imor-vad ha laouendigezh e-tro-pad an noz-hont. Ur gwir eergelch a vignonezh, me 'lavar deoc'h, seurt a garfemp adkavoud aliesoc'h e Breizh pa vez bodadegoù politikel l' Evidomp-ni, bepred, morse, evel pa larfen, ne oamp bet degemeret ken kaloneg l' Kerkent ha ma klevas ar bagad Skosia a oa ganeomp e oamp, va mignon ha me, daou Vreton, e yoc'hjont gant al levezeg hag ar souezh, e sailhont warnomp da stardañ hon dorr, hag hon envel a rejont abredur keltra, na petra l' ta l' Biskoazh kement all l'



Arabad sevel d'ar menez...

D'an eizh a viz here, da lavaret eo, antronoz deiz ar brezegegn, e rejomp ur pennad kkoz gant un ezel eus an S.N.P. Hemañ a zispiegas deomp penaos ne oa ket asur eus started mennozioù boterion an S.N.P. : un nebeud bloavezhioù zo, hevez ma lavare, ne c'hounete c'hoazh an S.N.P. nemed pemp dra eus ar mouzhoù. D'ar c'houlz m'edo o komz avad, e c'halled lakad kementad e vouezhoù da dreget dre gant l' ar pezh a voe anataet diwezatic'h : gw. disoc'hoù ar votadegoù e niv. 134 *Le Peuple breton*.



Ur banell ouezleg

Kement-mañ dre ma oa bet dizoloet eoul-douar forzh pegement war an aodeier l' An S.N.P. en doa bet skotet war an tich mad neuze en ur ober sevel todion ha frivadeg er bobl : «Petra ? Ha veze lavaret war beb leur. «Petra ? Ha lezel a ramp an embregerezhioù saoz, hag estran da skrapad hon eoul-douar diganemp, heb na rafemp van ? Diwar-neuze, ar strollad S.N.P. hag a zifanne war ar memes tro, eoul-douar ha gwirioù Bro-Skos, pesket-aerion aodoù ar reter, micherourion Glasco'h, ha kalz a rummoù tud all, a gemeras lañs en dilennadegoù.

Un dro bennag, hor mignon skos a ziskouezas dirmp gouled aber Ullapool : «Sallit ouz ar renkannad menezioù a zo ahont, paotred, emezañ, «Mad, setu l' D'ur perchenn bras int, d'ar c'hont a Gumberland. Ha c'hoazh, ac'han, ne wellit nemed lod eus e zouarnou... Hogos didud ha difrouz eo chomet menezioù an *Highlands* abaoe an amzer ma voe skubet kuit gant an aotronez ar boblad kouerien o vevañ warne. Talvezoud a reont bremañ da dachenn-hemloc'h, evid piljadur un domad pirdvidion hebken. Devezhoù-ard a vilonoù zo kondonet e-giz-mañ da vezañ kozhennou e-keid ma rank labourerion ar c'héroù tremen heb park, heb lozrh na netra, en askont da gerez an douar.



E Glasco'hon eus kavet ur gverren eus ar *Scottish Republican Clubs*. An S.R.C. -où o deus diazezet o *Cheallidurezh* war gentelloù Marx ha prederourion all eus an tu kleiz, hag ive war emrenezh Skos. Rag-se e nac'hont tezemnoù an debou-ourion eus an S.N.P., dre evel ma nachas paotred eus U.D.B. a-veremañ tezemnoù debouourion eus ar M.O.B. e 1964.



Ma l' Lanneron ger N'ao ket se eo se l' Karet am befe kontañ deoc'h hon troidi hag hon distroioù a-dreuz Bro-Skos, iwañ deoc'h taolennoù marzhuz an *Highlands*, astenn an danvez c'hoazh gant stad ar gouezleg ha karadegzh ar Skoziz, med aon am eus a teufe oberourion *Pobl Vreizh* da skingral o dent o lenn ur pennad tregeregachoù ken hir ha loen-eizh al Loc'h-Nessan ma n'eo ket hiroc'h l'... Ken ur wech all eta l' Mikael Briant.

1 - keallidurezh, ar gaallidurezh : e galleg, *idéologie* (ger savet diwar *keal*).

Glasco'h (*Glaschu - Glasgow*) d'an 12.10.1974 :

Goude bezañ bet daou zavezh e Ullapool, ked-all en inizi Lewis ha Skye, e tiskennomp, va mignon Mikael ha me, beteg Glasco'h. Glasco'h : heb mar, gwir gèrbenn ha kalonenn Bro-Skos : An hini n'anavez ket Glasco'h, eme al lavar, «henezh n'anavez ket Bro-Skos. Gwir-mad eo ! M'am eus soñj ez eo d'ur sadorn eo, war greiz an deiz, en em gavomp war ur gourstred eus kreiz-keñ Glasco'h, bauez e moradour tud. Tud a beb seurt : Skoziz, Iwerzhoniz, Saozon, Pakistaniz, Afrikaniz, Protestant-ed, Katolikad, mezwerion, bourc'huzion, ha me 'our.

KOUMANANTIT DA
LE PEUPLE BRETON
B. P. 304 - 29273 BREST CEDEX
ANV ANV-BADEZ CHOMLEZH
a gas l' gouarnant breton : 20 F (1) skizmañ 30 F (1)
estrennoù 30
C.C.P. RENNES 2365-76

**JUSTISS UR
RENKAD-TUD**

Tennet eo bet diouz daouarn ar barnar **Pascal** afer ar vinerien (mengleuzierien) lac'het dre un taol-grisou e **Lievin** e Bro-Flandres. Souzhus eo an dra, ne gav ket deoc'h ? An eil gwech eo. Pa oa oc'h ober eus e wellañ ewid disoloi muntreter **Brec'hed Dewevre** e vo lammet an enklask dioustrañ ganti an hevelec' abegoù : fasioù en e doareoù-furchal. Peb hini a oar pegeñ aes eokavoud traoùgouñ ne heuilhont ket mad al lemmoù, laziet-spontus a-raoñh-kaser.

Deus eo ar «barnet **bihan**» da lakad an tamall war dud re dost ouz «**maffius**» ar vourc'hision ha prest e oa da vont pelloc'h. Diw wech re, e memo an holl. Mar ne dro ket mad spered **Pascal**, petra a c'hortos ar pennoù bras ? Met re anavezet eo ha doujet gant miliadoù a dud.

E gwirionez, e komansomp da gompren troiù-kamm justiss ar gopitalisted. Pa'z eus laezret en o zouesk ne chom ket met moged eus an tan heb re a drubuilhoù ewid ar re gablus, pe ne glevomp ket netra ken. Sellomp ouz ar «**Parminoe Foncter**», gwin fall Bourdel, «**le canard Enchalme**», hag all... Gant al labourerien o tifenn o bara penderiek, ne vez ket ar memes jea : toull-bac'h, ur bern a arc'hant da reñf, hag all, evel e Bro-Naoned (60 peisat kondaonet, 9 michourer e ti **Sotrimex** tost da **Saint-Nazer**).

Dileet eo deomp diskouez heb ehan e pesur «**kevredigezh**» (soosiet) emaoomp. Penaos ober ? Dav eo lakaat assemblies an allestañt ma c'hellomp, an holl daoliñ fall ijinet ha graet ganti ar vourc'hision lorc'hus hag a grad advelel buhez tud an noblatis ewid o'chont.

**PA'N EM LAK
«PAOTRED MAI'
ROBIN» DA
DENNAN WAR
«BEG E DOG»**

Peoc'h ha buhez vad, a lavare Giskard a-raog ar vakafisoù. Ya, sur, med red 'vefe c'hoazh gousoùd piw eo piw pezh n'eo ket aes hiziv an-deiz.

E gwirionez, er c'hêrioù bras, n'ousker ket ken piw eo an danjerusañ : ar forbannepe eo an arc'herien. A-wechoù, e vez pilet ganti ar boliserien, tud sioù o 'tapoud ur bannac'h en un ostaleri bennag hag e-keit-se, e red kuit an hailhoñd ; a-wechoù all, e vez tennet war an dud onest o poutmen pe o labourad e kêr. Biskozh kement-all !

Newez 'so, ez eus bet krouet ur vridgenn lispial ewid redig war-lerc'h ar forbannepe vraz, emni poliserien eus an dibab, safesed !

Ur biljadur eo ewid ar boliserien-mañ tennañ a-dreus hag a-hed, debron m' o deus atav eo o bised azaleg ma vez ur revolver bennag ganto.

**AR BED
en-dro dimp**

**«UR JENERAL A
DALV UNAN ALL»**

En deiz all, o deus tennet war boliserien all ha lac'het un enseller yaouank, an aotrou **Potter**. Gloaset o deus ivez daou implijad eus ar post a oa o tremen dre ase. E-pad-se, eveljust, eo nijet kuit al laboussed fall. Setu ase labour, me lavar dooc'h !

Sindikajoù ar polis n'int ket laouen gand kement-mañ, eveljust, ha darn anezo da damall da vistir an diabarzh, Poniatowski e doareoù d'ober. C'hwec'haz war ar glou bew e-lec'h klask mogañ anezo, setu ase emezo, pezh vez goulenet ganeomp.

**KALZ TROUS ewid
NEBEUD A DRA !**

E dibenn mis gouere eo bet bodet e Pales Finlandia-Tako, en Helsinki, renerien 33 stad eus Europa ha war ar marc'had, president ar Stadoù Unanet hag heni ar C'hanaad.

Pa'z ar vodadeg-mañ a oa klask diazezañ ar peoc'h hag ar c'hen-labour etre stadoù Europa rannet e daou rummad : Kornog ha Reter, abaoe ar brezel diwezhañ. A-boues o ar c'huennoù da studiat, eta.

Hogen, n'eus ket diwanet kalz tra newez en Helsinki ; peb rener en neus graet ur brezegenn war an tou bras hag e-divaes ar sal ar pennoù bras o deus bet digarez d'en em gavoud da gomz un tammig an eil gant eglie eus kudennoù ar mare-mañ.

N'eus bet diviser netra resis na diwar-benn Chypre, na diwar-benn ar Portugal pe an diw Vro Alamagn, Kama-douriezh war-wel ne c'hell ket mont pell war-raog ; dre gurz e vez ingalet ar peb poueusañ. Neus forzh penaos, ewid ar Russed hag an Amerikaned eo bet rannet ar bed e Yalta ha mad pell zo.

Ur roll mennoioù 'zo bet sinet e dibenn ar c'hendalc'h. E-barzh ar roll-se, eo bet meneget ar gwir he deus peb pobl da zibab he hent he-unan ha da reo he aferoù. Pegen braw neketa ? Ya, med, etre al lareg hag an ober em a mar.

Ni, Bretoned, a oa er se vad.

Deuit d'ober un dro beteg
TI ARZOUR MENEZIOU DU.
Koz Cleunf
56 - Langoned

War a seblant, n'eo ket un drajedenn a zo bet c'hoarriet newez 'so e Bro-Nigeria, ur farsadenn ne lavaret ket. Araog kuitaad e vro ewid mont da g-Kampala, e-nrova ar Jeneral **Gowon** kaset da Londrez e wreg, e vugale hag e vreur bihan... (daoust-hag-ef e oa assemblies gante ur c'hi, ur c'hazh pe ur marmouz bennag, n'ousker ket...).

Met, eveljust, van heni a ya da chassal e Kampala e vez kollet gantañ e **biass e Lagos**. N'eo ket ar c'hrenn-lavar-mañ koulikoude a zo bet meneget ganti ar Jeneral **Gowon** goude gouvezet gantañ e oa bet penn-bouzelennet : un ofiser a-fesson eveltañ, ha saoneket mel-penn-ki-ha-troad a oar dre ebor **Shakespeare** en e bezh : «*Ar bed holl, emezañ, zo anezañ ul leuc'hoari el lec'h ma'e eus paotred ha marc'had o vont e-barzh hag e-maez*» (Ar frazezin-mañ zo tennet eus **As you like it** : **Evel ma karit, savet ganti Shakespeare**).

Ha newez ? N'eus ket kudennoù ken e Bro-Nigeria ? Ar c'houll 'n'eo. Kudennoù ar vro re vras ha re binwid martese. Gwir drajedenn Biafra zo un tammig ankouezet, med diaz-ere eo bet betevremañ det'heñ unaset pobloù disheñvel-kreñn an eil re diouz ar re all. Kristen eo **Gowon** ewid poblod ar Su ha **Mohammed** zo musulmad ewid re ar Norz. Animested zo ive.

Daouzeg rannvo zo bet krouet e 1967. Ewid lodennit an arc'hant gounezet dre werzh ar petrol, e rannet gousoùd ped den oa e peb rannvo. Ha setu perag un niveridigezh¹⁾ zo bet aszet e 1963 ha unan all e 1973.


Setu kont an dud e Bro-Nigeria hervezzo :

	1963	1973
En holl	55,6 Million	79,8 M
Hanterez	29,8 M	51,4 M
Kreisteiz	25,8 M	28,4 M

Pobloù ar c'hreisteiz ne oant ket kountant dija e 1963, med ar wech-mañ newez ! «*An niveridigezh diwezhañ, emezont, n'eo ket bet sirus. Biskozh kement-all ! ur c'hresk a 70 % e dag bloovezh hepken ! a zo gwasoc'h, niver deutaed peb rannvo a vo diviset ganti ur sifrou-mañ ivez.*

Med unad betañ re sec'het memestra. Komzoù braw ur jeneral newez erruet e penn ar stad (gant un tankoù en-adreñ) zo bet a-viskoazh kreñvoc'h eged n'eus forzh pesant sifrou ijinet ganti e'hwiled zo ewid touellañ an dud !

1 - Niveridigezh : rercasennant



**GWIN
BRO-OKITANIA**

Bez' ez eus bet trous e dibenn mis gouere, e Bro-Okitania : hentoù stouvet, skoliet, mein-ki-metrouñ liwet pe diverket ha manifestadegoù a beb sort. D'an 31 a viz gouere eo bet diverket kement panell ha talbenn a oa e Bro-Langedeg. C'hoant' deus tud ar vrosed da ziskouez d'an douristed, a oa o bro ur vro gollet e divaes Bro-C'hall hag europ, ar vro o wervel. Perag 'ta kement a vec'h ? hag a drous ?

Abalamour d'ar gwin an hini eo. Ya, tudoù ! daoust d'ar frañsien bezañ lonkerien gwin n'hell ket Okitania gwerzhañ o hini : re fonnas hervez eo bet gwiniadennoù (1973 ha 1974) hag araog daou vis amañ, e krogo ar vendem.

E gwirionez, ez eo Bro-Okitania ur vro gollinet evel Breizh, n'eus ewid lareg nemet frouezh ha dreist-oill resin ha setu pa

navezket gwerzh ewid ar gwin, eo fall an traoù. E mod all, n'he deus tamm galloud ebet ar vro ewid ingalñ he-unan he aferioù. Ar re-mañ a vez graet war o zro e Paris pe kentoc'h, e Brusel, hag amad eo, penaos ar c'henvar'had pe ar marc'had komun zo renet ganti ar gopitalisted vras. Ar re-mañ ne reont foure kaser eus al labourerien, peisañted pe gwiniemerien vihan. Setu perag e vez etre Bro-C'hall gwin eus Italia ha leset gwin Okitania da drenkañ er c'havioù peogwir n'eo ket possibl stribañ an oil anezañ ewid ober gwin-ardant. Memestra 'vez kont e Breizh, gwech ganti an arc'hant, gwech ganti ar c'haolleur, gwech ganti ar pesked pe ar moe'h.

Erru eo poent bras chañch penn d'ar vazh !

**K
A
BRETONS
I
G
S**

**E
G
WAIEN**

**PRIS
CHOAS
TALVOUDEGEZH**

**KABIGOU, KABANOÙ, PULLOVERIOU
DUFFLE-COATS, MANTILLI
MERC'HEDE, PAOTRED, BUGALE**

Ti Y. Daumer
War ar c'hae, 15, st. Louis-Pasteur

Beb daou viz lennit :
AL LIAMM
(savet e 1945)
ur gelaouenn nemeti o reñf,
c'hwec'h gwech ar bloaz,
barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù
a beb seurt ha keleier.
80 pajenn e peb nivernenn.
Renner : Roman Huson.
Koumanant : 30 lur. Studierien : 25 lur.
Mime S. Cherel, 100 bd de Verdun Rennes
C.C.P. 2184-34 Rennes.

AR FALZ
KELAOUENN DRIMIZIEG AN Emsav
diarzet ganti Yann Sohier
bodet ennañ skolaerien ha kelennerien.
Vreiz
a-du ganti ur skol vrezeg ha laik gwirion.
Lennit *Ar Falz* : Koumanant d'*Ar Falz* :
(25 lur ewid h nivernenn)
AR FALZ, stradañ Nan ar Gwez
29245 Plourin-Montroulez
C.C.P. 430-20 H Roazon.

**LEVRIOU
BREZHONEG
(kozh ha newez)
TI GIRAUDON**
30, stradañ Keranpont
22300 LANNUON
Pg. 35 04 90

PAPERENN EMESELAÑ
HANW
HANW-BADEZ
CHOMLEC'H
e c'houllenn doue da vevañ
U.D.B. - B.P. 304 - 28273 BREST-CEDEX

**KOUMANANTIT DA
POBL
VREIZH**
B.P. 304 - 28273 BREST-CEDEX
HANW
HANW-BADEZ
CHOMLEC'H
e gwas e gouarnamant breizh : 10 lur (1)
skolier : adalg, 20 lur (1)
estroner : 30 lur (1)
Amañ an arc'hant dre c'hekigoù-bodet
chekigoù-bodet (1)
(1) Divizet er gerc'hoù na servijont ket.
C.C.P. RENNES 2746-79.

BREIZH N'EMA KET DA WERZHAÑ

AR FEULSTER


WAR PIW EO MAD SKEIÑ ? WAR PIW EO GWELLOCH NON PASS SKEIÑ ? SETU UN DRA DA C'HOUSOD ! KENKOULZ BEZAÑ DIOUSTU WAR AN TU MA D.

ARABAD SKEIÑ

SKOIT KENTOC'H



HA MA TEU UNAN BENNAG
DA LAROUD DEOCH :



SKOIT WARNAN !